

750 A c



## GUERZ

*Var sujet eun Den Yaouanq a voa deut da baea  
pê ar scoët goude e varo.*

---

GUERZ AR GARNEL.

---

**S**PERET-SANTEL, m'ô ped, anflamit va speret,  
Da gana eur c'hantic evit ar Vretonet,  
Var sujet eun exempl trist pehini zo êruet  
Ebars en Breiz-Izel, e mis Du tremenet.

Crena ra va c'halon ive va oll memprou,  
Va daoulagad ne reont nemet scüilla daëlou,  
O tont da gonsideri peguer trist ê ar matier:  
Goulen a ràn sicour eus ar Verc'hez santel.

Eun den yaouanq, sivoas, voa n'em abandonet,  
Goude ma voe maro e dud gant ar c'hlénved,  
A voa n'em abandonet da bep seurt tristidiguez,  
Da bep tristidiguez, da bep seurt paourentez.

Evel ma voa youanq, ne grede clasq netra:  
Tud vad, dre charite, a gass tamou dezâ;  
Hac evel ma voa yaouanq e teujot d'er scandalat  
Pa na gare sevel ha mont da labourat.

— 2 —

Souffr a ra mil injur gant guir baciante,  
O laqat e fizianç er Verc'hez beniguet,  
Dre m'en devoa e imach hac hini ar Bassion,  
Ha ma rê diraze bemdez e orêson.

Undeneus arc'hontre, un den eus ar c'hartier  
A deuas d'e velet, o clêvet e vizer,  
En eur larat deàn, deus d'am zi da labourat,  
Ar c'hèz a respontas : ne meus qet a zillad.

Gouzout a ràn certen labourat an douar;  
Mes allas! eme'r paour, ne meus na pal na mar,  
Pêvar scoët a vancfe din evit en em equipa;  
Me yêlo d'ho ti sur evit ho paea.

An ozac'h var ar guer a ro ar pêvar scoët,  
O lavarat deàn : Va mignon, ne vanq qet,  
En eur lavaret deàn : deus d'am zi da labourat  
Pa vo bet pal ha mar ha prenet da zillat.

Monet a ra d'e di, ma voe eur pennad mad;  
Plijout a rê deze certen da labourat;  
Un devez dreist ar re all e voe meurbet estonet  
O sòujal er paour-qêz pelec'h e voa chomet.  
Ma ejont ta da velet, hac e voe cavet maro  
Ebars en e lochic, var eun dornad colo.

Lienet voe e gorf vit bea entêret;  
Ar brud a zavas prest, ma teujot d'e velet.  
An den-mâ'deuas ive evel m'oa eus ar c'hanton,  
A deuas d'e velet... O Doue pez eston!

Pa zorti eus an ti, d'an oll e lavare :  
Orato birviquen e ene ne antre

## — 3 —

En Barados un Doue , qen en devezo paeet  
Ar pez a rois deàn n'eus pell pêvar scoët.

Dre ar c'homzou terrupl pere a brononças ,  
N'oun penos an douar d'e lônqa ne zigoras ,  
Oc'h arrêti eun ene a voa o vont d'ar joayou ,  
A vije recevet gant Jesus en eêvou.

Ar Verc'hez beniguet , dre ma voa dêi fidel ,  
A accord eur mennad evit he servicher ,  
Ma teuje var an douar eun istant da labourat ,  
Evit monet d'an ti da baea ar barbar.

Monet a ra d'e di , ha ma voe recevet  
Goulen a ra labour , ma voe deàn roet :  
Labourat a ra er parq qement hac an tri güella ,  
Ar pez zo estonus , hep dêbri nac eva.

Pa zeu coulz ar repas , caër e vije'r pedi  
Evit monet gante assambles da zêbri ,  
En em denne a goste , hac eno var e c'hinou  
En em string d'an daoulin evit souffr e boaniou.

Dont a ra'n uzuiller , qemer a ra eston ,  
Hac én monet ractal da laret d'ar Person  
En devoa eul labourer hac a rê qement ha tri ,  
Ar pez zo estonus , hep eva na dêbri.

Mâ , eme ar Person , continuit bepret ;  
Brêmâ zouden vatant me yêlo d'e velet.  
Mes pa êruas er parq , dre bermission Doue ,  
Ec'h anaveas pront penos voa eun ene.

Mecônjur , eme'r Person , lavar din me a ped ,  
Nê qet hirio eiz de em boa da entêret ?

— 4 —

Petra a zefot dide? petra a glasques amâ?  
Petra a zefot did evit da zelvira?

Pêvar scoët am boa bet digant mestr an ti mâ,  
On deut dre vouir voyen sur evit o faea :  
Oh! e leac'h pêvar scoët, eiz certen a vo roet,  
Eur veach, ene paour, qen a vi delivret.

Ne meus qet ar pouvoar da antren er joayou,  
Nemet gant va Æl-mat e clêfen ar c'hêlou;  
Pedit Doue evidon, me a ya prest dan êvou :  
Varc'hoas d'ar memes heur me rento ar c'hêlou.

Dont a ra ar Person da zigass an arc'hant,  
Ma vije delivret a boan hac a dourmant.  
Mes me, eme an ene, am boa int bet digantàn :  
Poc'h eus ar vadalez, me o rento deàn.

Pa astennas e zorn da guemer an arc'hant,  
E santas an ardor, ar boan hac an tourmant;  
E vrec'h deo betec e scoa en istanta voa dêvet,  
An arc'hant eus e zorn d'an douar zo quëet.  
Adieu, autrou Person, me ya bremâ d'ar joayou,  
Me bedo evidoc'h Jesus-Christ, hon Autrou.

Pa dleo un den dêc'h, pa yêl eus ar bed-mâ,  
Elec'h dezirout drouc, pedit Doue gantâ :  
Pedomp bepret ha meulomp ma zayo da repos  
Ha da veuli Doue en gloar ar Barados.

FIN.

